

# GWERC'HEZED AR VRO

*Patronez douz, Itron ar Follgoad,*  
Taolit ho sell war vro Léon,  
Ken dudius dirak ho taoulagad  
Hag a bell zo tost d'ho kalon.

DISKAN :

*Evel Salaun, o Maria,  
Ni a c'houlenn hor bara.*

Itron Varia Ker an Itron,  
Grit ma chomo, 'hed an amzer,  
E pep spered evel e pep kalon,  
Ar feiz kristen e bro Dreger.

*Gwerc'hez Vari, kreskit ar feiz  
E pep parrez eus hor Breiz !*

Itron Varia *Ru-Maen Goulou*,  
Digasit d' eomp, a-berz Done,  
Da heul ar peoc'h e kér hag er mae-  
Yec'héd ar c'horf hag en ene. [ziou,

*Itron Varia Rumengoll.*  
Bezit ato « Remed-holl! »

Itron Varia goz'ar Porzou,  
Bezit eun deiz ouz hor gortoz,  
P'en em gavimp dirak dor an Nenvou,  
War dreuzou porz ar baradoz.

*Itron Varia ar Porzou,  
Digorit d'ezomp an Nenvou !*

Patronéz vat an tiegezioù,  
Bennigit poan al labourer;  
Lakit frou-ez hag eost leiz ar mae-  
Hag e kanimp drant ha seder. [ziou.

*Itron Varia ar Maeziou,  
Santela-it hor poaniou.*

Rouanez dous, brevit ar gounnar  
A lak an dud d'en em zraflla;  
Grit ma vleunio ar peoc'h war an  
Ha m'o dezo an holl bara, [douar

*Mestrez ar peoc'h, d'ho pugale,  
Ro-it buan peoc'h Doue.*

*Rouanez Frans, Itron Varia,  
Gwelit ho pro din a druez ;  
Hastit afo sikour ho merc'h hena  
Hag e savo leun a yuhez.*

*Klevit pedenn ho pügale,  
Savit ar Frans hep dale!*

*Rouanez Vreiz*, taolit ho skoazell  
War ho Preiziz e pep amzer ;  
Ha diwallit diouz dismantar brezel  
Hon holl diez ha parkeier.

*Itron Varia Vreiz-Izel,  
Savit uhel he banniel !*

### Aotre da youla

Kemper 1 Here 1944.

P. JONCOUR. *vikel* *vrás.*

Ti-Moulerez Bro-Gerne, ru an Dudchentil, Kemper.


8N3-5-012



# DISTRO-MEUR

## AR BEC'HERIEN OUZ DOUE

(Mision bras ar Werc'hez Vari dre ar vro)



## LAUDATE MARIAM

*Laudate, Laudate, Laudate Mariam* (2 w.).  
*Mamm Doue, o Gwerc'hez* } 2 w.  
*Bezit va c'harantez.*

- |  |   |    |  |    |
|--|---|----|--|----|
| 1.   |   | 4. |  | 7. |
| Laudate ! Mamm zantel,<br>Dreist an oabl skedus.<br>Hor c'halonou fidel<br>A bigno joiaus. | War lein ar meneziou<br>Ar pastor derved<br>War-zu bolz an nennou<br>A lavar bepred :     | 5. | An élig mailliuret<br>En e gavell striz<br>Epad ma 'z eo kousket<br>Ho ped en e c'hiz. |    |
| 2.   | War e vagig dister,<br>Ar martolod paour<br>Lavar de vamm dener,<br>Gant eur galon aour : | 6. | Breiziz, a-vihanik<br>Betek ar maro<br>O c'halon birvidik<br>Laouen a gano :           | 8. |
| Ra jomot hor Mestrez,<br>Steredenn ar mor :<br>C'houi 'zo hor Rouanez<br>Rouanez Arvor.    | Gant an oad daoubleget,<br>An tad koz en ti,<br>Diskabell daoulinet<br>N'ehan d'ho pedi.  |    | E palez kaer Jezuz<br>Bodet dizoursi<br>Eun deiz ni 'vo eürus<br>En dro da Vari.       | 9. |
| 3.   |   |    |  |    |

## KALON DINAMM MARI

DISKAN :

*Ave, ave, ave Maria!*  
(2 w.)

- |   |  |   |  |  |
|---|--|---|--|--|
| 1.  |  | 4.  |  | 7.   |
| Kalon dinamm Mari,<br>Leun a garantez,<br>Ni' zeu d'ho saludi<br>Gant an holl Elez.         |  | Ro-it d'an den dallet<br>Gras ar sklerijenn,<br>D'ar pec her kaledet<br>Gras ar binijenn. |  | Stouet omp d'an douar<br>Dirak'hô Kalon,<br>Gant keuz ha gant glac'har<br>Q'choulein pardon. |
| 2.  |  | 5.  |  | 8.   |
| Peunteun an holl c'hrasou,<br>Sellit gant true<br>(Ouz hon holl ezommou:<br>A gorf, a ene.) |  | En hon tiegeziou<br>Lakit karantez,<br>Hag'en hor c'halonou<br>Pec'ch ha levenez.         |  | Ennocc'h hon holl fizians<br>Epad hor buhe ;<br>Ennocc'h hon esperans<br>Er maro ive.        |

## SANTEZ MARI, MAMM DOUE

Evit en em uestla d'ar Werc'hez

1. Santez Mari, Mamm Doue, e pep amzer Gwerc'hez,  
Jezuz a zo va Roue; ha c'houi va Rouanez.  
Evel ma'z eo va barner, bezit va fatronez,  
Hag evidoun dirazan bezit alvokadez.
2. O Gwerc'hez, d'eoc'h e touan beza korf hag ene,  
Netra enep hoc'h enor ne c'houzanvin morse ;  
Ne lezin den en dro d'in, ma c'hellan, d'ho poania,  
Da boania Mamm va Zalver, ar Vamm an denera.
3. Evit enori gwelloc'h hoc'h hano dous meurbet,  
O Mamm ar wir drugarez ha Mamm Salver ar bed,  
'Vit ar beorien ezommek me 'vo madelezus,  
Dre ma'z int holl breudeur d'in, dasprenet gant Jezuz.
4. 'Hed va buhez em labour va zikourit bepred,  
Dreist-holl e pred ar maro, a ! n'am dilezit ket.  
En ho taouarn d'am Barner ma tougit va ene,  
Sur ez in d'ar Baradoz d'ho meuli goudeze.

## ITRON AR ZILVIDIGEZ

DISKAN :

*Truez, va Doue !  
Hor c'heuz zo bras.  
Savit hor bro hep dale  
Ken uhel ha biskoaz !*

1. Dallet oamp holl ha mezvet gant ar pec'hed,  
Hep aon na mez e torremph ho lezenn.  
Ha ret 'vo c'hoaz d'ar gurun ha d'al luc'het  
Diskouez ez eus eur Mestr a-zioc'h hor penn ?
2. En arne du eur stereenn o para  
A ro kalon ha nerz d'ar sturier paour ;  
Sellit en nen, ar c'houmoul a dano-a,  
Rak savet eo ar werelaouenn aour.
3. Gwerelaouenn, piou oc'h nemet ar Werc'hez,  
Zo diskennet war gern hor meneziou ?  
C'houi eo, Mari, Itron ar Zilvidigez,  
Ha dont a rit ho torn leun a c'hrasou.
4. Gwerelaouenn, c'houi eo ar vamm benniget,  
Ar vammener, ar vamm madelezus.  
C'houi l'avar d'eomp : « Pedit, ma viot selaouet,  
Ma pardonno Kalon va Mab Jezuz !
5. O Gwerc'hez dous, eienenn an esperans,  
E-harz ho treid emaomp oc'h hirvoudi ;  
Bro-C'hall e kaon a zell ouzoc'h gant fizians :  
Hor zelaouit, hor zikourit, Mari !

## M'HE GWVELO, EUN DERVEZ

TON : *J'irai la voir un jour.*

DISKAN :

*Eun deiz, er Baradoz  
Me a wela va Mamm,  
Me 'gavo va repoz  
War he c'halon dinamm.*

1.

*M'he gwelo, eun devez,  
E bro gaer ar Baradoz,  
Mari, va Mamm, va repoz,  
Va joa, va c'harantez.*

2.

*M'he gwelo, eun devez :  
Setu c'hoant bras va ene,  
Setu confort va buhe  
Pa vezan en enkrez.*

3.

*M'he gwelo, eun devez :  
Unanet gant an alez,  
Me 'gano he santelez  
'Vel floc'h en he falez.*

4.

*M'he gwelo, eun devez,  
E klod an nenvou skedus :  
Kurunet 'vin gant Jezuz  
'Vel mab he c'harantez.*

5.

*M'he gwelo, eun devez :  
Me 'vezo 'vel he mignon,  
Luskellec war he c'halon  
Hed ar beurbadelez.*

## ROUANEZ ARVOR

DISKAN :

*Rouanez Arvor, dalc'hit d'eomp hor feiz,  
Ra vo karantez bepred en hor c'hreiz !*

1. Kalon hon tud koz hoc'h eus gouinezet  
Kerkent ha m'o deus hoc'h anavezet.
2. Aba, gant abeg, e vez lavaret  
Ez eo gant Breiziz ar Werc'hez karet.
3. D'ar mammou, du-man, Mari, mamm dener,  
A ziskouez an tu da heuilh o dever.
4. Gant Mari Gwerc'hez, plac'het yaouank Breiz  
A vez kenteliet war ar vuhez reiz.
5. Ar vugaligou, ken stank en hor bro,  
D'ar Werc'hez, o mamm, o c'halon a-ro.
6. Kement stad hag oad, pep micher e Breiz  
A gas da Vari meuleudi bep deiz.
7. Nag a bet iliz a zo bet savet ;  
Dindan hec'h ano pet chapel sakret !
8. E pep korn er vro, nag a bedennou !  
Enoret e vez dre binijennou.
9. Evit pep breizad ha pep breizadez  
Ra vezot bepred eun alvokadez.
10. Deu-it war zikour ho servijeren,  
Harpit ar c'houer, ar besketerien.
11. Teurvezit diwall ouz an taoliou treiz  
Eg brezel, er peoc'h, hor zoudarded keiz.
12. Mirit, ni ho ped, stereenn garet,  
Hol listri-brezel, er mor kounnaret.
13. D'an den klanv pe yac'h, d'ar bihan, d'ar bras,  
Hervez an ezomm lodennit ho kras.
14. E berr, kendalc'hit da skuilh ho pennoz  
War ar Vretoned bemdez ha bemnoz.